

YF_0136_Na ma mestrez a zo dimeet

Na ma mestrez a zo dimeet
Me garche ha ne vije bet

Dimeet gant ur zabortier koat
'n ul lojig bihan e korn ar c'hoat

'n ul lojig bihan e toull dizro
Lerc'h ne vez den d'he c'hoñsolo

Lerc'h ne vez den d'he c'hoñsole
Met sabotier, hennez a ree

Hennez a lare dezhi bemdez
Tavit, Perin, na ouelit ket

Tavit, Perin, na ouelit ket
Koat d'ober tan na vanko ket

Koat d'ober tan na vanko ket
Bleud d'ober yod, ne laran ket

Pa vanko dour, me hey da-vid
Pa vanko boued, me yelo kuit